

*Discours*  
Entre daou Ten yaruaq.

(214, suite)

Me a bed an amour Cupidon, (bis)  
 Hag er ped a greis va c'halon (bis)  
 Da rei ar c'hraç din da ober  
 A nevez-flam ur Vestrez qer;  
 Eur plac'h a ve d'am fantazi,  
 Rac ne meus bet biscoas ini.

Me vel va Mestrez e vont ar-biou din (bis)  
 Er na gredân e saludi, (bis)  
 Na lavaret outi eur g'er,  
 Ha bezja c'hoant din da ober,  
 Defot na allân goût ar feçon  
 (215) Da blizout d'e ompinion.

It en euy tu benac a zistro, (bis)  
 Va Mestrez, m'o cavin êno; (bis)  
 Me a gontfe dec'h franchamant  
 Va zantimant, va Douziq coant;  
 Ha goude ma vez d'o fantazi,  
 C'houi a gontfe din-me oc'h hini.

Pel a zo demeus a amzer, (bis)  
 Aboue m'am boe bolontê selêr, (bis)  
 Da lavaret dec'h an draze;  
 Rac o feçon d'in a blije  
 Ho feçon vad a blije din,  
 Er na gredon en anonsi.

Posubl e ve, va Douziq coant, (bis)  
 E ven-me bet qer sufizant; (bis)  
 E ve deut va bolontê vad

Da blizout d'o caer daoulagat! (216)  
 Da zaoulagat nep a garân  
 Mui qement tria zo er bed-man!

M'ar dê a galon a comzit, (bis)  
 Va Mestrez, vel ma livirit (bis)  
 N'en dê get capabl an teod-ma  
 E nep feçon da explica  
 Na da explica peg'en don  
 E za ho comzou em c'halon.

Va c'homzou ne dint get charmant, (bis)  
 Mes va bolontê zo ardant, (bis)  
 Qer a galon evel a her,  
 En hoc'h andret, va zerricher.  
 Erit bolontê, mar gallân,  
 Ne chomfet get pel da hirvân.

Gallout avialc'h sur, va Mestrez, (bis) (217)  
 Erit va lemel a zies; (bis)  
 Da ziangaji va c'halon,  
 A zo ranfermet en ho prizon.  
 Ma noc'h eus ostantân nep true,  
 Roit deün e libertê.

Me ne roin get dec'h libertê, (bis)  
 Na ve glac'har o pe goude; (bis)  
 Al libertê zo euy itron  
 Da nep e c'homer ep rizon,  
 Hag a ra poan speret dan den  
 Er bed-ma sur pe en eben.

Va Mestrez, eur g'ir vad din c'hoaz, (bis)  
 Hag e vezin quel joaüs bras; (bis)  
 Clévet eur g'er demeus ho pen,  
 E vijen e creis ho courc'hemen;  
 Ha ne voa fal va esperanz;  
 Pa laqis ennoc'h va fizianz.

(218) O fizianz o poa laqet mad. (bis)  
 Ma c'hoant va Nam ha va Zad, (bis)  
 Cassit eur re beteg enne,  
 Beteg an eil hag egile;  
 Hag eus ar respont o po bet,  
 Me a yel ganec'h d'o c'haouet.

Caset emeus beteg enne, (bis)  
 Beteg an eil hag egile; (bis)  
 Da gant ho liguez enorabl,  
 Evit casut o bolonté vad;  
 Da gant ho qerent en daou du,

Tout e tolon a bral dec'h-u.

Mar de quir ar pey a beret, (bis)  
 Me a ya ganec'h d'o c'haouet. (bis)  
 Bonjour, va Nam, bonjour, va Zad;  
 Setu amañ mañ eur ozac'h mad,

(219) Prezantamant eus va goulen:  
 Emouz ecreis e c'hourc'homen.

M'ar doc'h ho taou en em choazet, (bis)  
 O trespantia ve pec'hed. (bis)  
 Ni a ro dec'h hon beñs hon daou,  
 Hag eur nebeud eus hon madou.  
 Red e vo comz eus ar C'hure,  
 Da rei d'an daou den-ma liberte;  
 Red e vo comz eus ar C'hure,  
 Ma zaint o daou en eur quele.

Fin.

(Vol. II, p. 214-219.)  
 14 str. numerotées.